

KANTIK

ITROUN VARIA LAMBADER



Diskan :

Kanomp, kanomp gant levez
 Henor ha gloâr ha karantez
 D'ar Werc'hez santel, hor mam ger } *bis.*
 Itroun Varia Lambader.

1

A-oll viskoaz hor c'hentadou
 O deuz kaset ho fedennou
 Varzu Doue, hor Mestr karet,
 Dre ho kalon, Mam benniget

2

Hon tour-brudet a Lambader
 Evel e vreur, tour bras Kreïsker,
 Petra' c'hell embann en he yez
 Nemet meuleudi deoc'h, Guerc'hez ?

3

Kizellet fin, e gern uhel
 A zeblant strinka en avel
 Hor pedennou da vont d'an env
 Beteg ho trôn, o Mam Doue !

4

Ha piou biken a lavaro
 Ped blâvez ha ped kantved' zo
 Ma voue savet-d'ar wech kenta
 Eur japel d'eoc'h er barrez-ma ?

5

Ar Vretoned 'n ho chapel goz
 Evel e porz ar-baradoz
 A garie dont da bardouna
 Ha d'ho meuli en eur gana.

6

Digas a reant, Mam benniget
 Beteg ho ti tud mac'hagnet ;
 Hag, hi pare, ho branellou
 A stagent ouz ar mogeriou.

7

Digas a reant ho bugale
 Da glask ar prezeg, ar bale
 En ho chapel, var an aoter
 Tost d'ho kalon, o Mam dener.

8

Dirag ho skeuden, Mam garet
 Ar zoudard yaouank daoulinet
 Gant e gerent, a c'houlenne
 Bennoz araok mont d'an arme.

9

Dirag ho skeuden, o Gwerc'hez,
 Stouet ar priejou nevez
 A garie dont d'en em voestla
 Da c'hwir Rouanez ar vro-ma

10

Ha pegen stank ar glanvourien,
 Dirag ar maro, en anken
 Zo bet douseet ho angoni
 Dre ho madelez, o Mari !

Pegen niveruz an Anaoun
Savet d'an env euz ho frizoun
Dre vuzudou ho madelez,
Guir vam bepred leun a druez !

Siouaz ! an amzer a ziskar
An traou starta var an douar :
Ho ti, Guerc'hez, a voa kuezet
Dare da veza dilezet.

Da fin an naontekved kantved
Ar japel goz voue adsavet ;
Hag e leac'h beza paour ha noaz
Ema kaerroc'h eget biskoaz.

Evel cur brinsez eo gwisket
Gant he zae mein dantelezet :
An eol var zouar Breiz-Izel
Ne bar ket var gaerroc'h chapel.

Ama evel gwechall, Guerc'hez
C'hui a ziskuez ho madelez.
Ama evel er feunteun ven
Eo krenv an dour en eienen.

Ama e kav an dud fidel
Dour beo ar vuez eternal,
Dour beo ar grasou burzuduz
A rannit oll a-berz Jezus.

O Gwerc'hez sakr, o Mam Doue !
Diwallit mat ho pugale ;
Var hor parrez, var Breiz-Izel
Astennit bembdez ho mantel.

En hor Bro Frans enn avel-foll
A dag ar wirionez dre-oll :
Mirit bepred hor sperejou
Diouz bilim ar falz-kredennou.

Gant oll blijaduriou ar bed
Hor c'haloun baour 'zo touellet :
D'ober d'ezho bembdez brezel
Hor sikourit, Gwerc'hez santel.

Grit ma chomo griziu ar Feiz
Doun e kalonou Plouvornis,
Evel griziu ar gwez dero
E kreiz kalon douar ar vro.

D'ar yaouankiz roit furnez,
D'ar vugale sentidigez
Ha d'ar gozni kalon nerzus
Da ziwaska buez poaniuz.

Ia, pec'her paour, ia pec'herez,
Ma pedit gant feiz ar Werc'hez
Na viot mui sklavour Satan
Ho chadennaz da vont d'an tan.

An durzunel, ar gwennili
O deuz ho neiz d'ho goudori
O Lambader, c'hui vo bepred
Va neizik-me, va neiz karet !

Da zeiz ankenius va maro
Gant fizians vraz me lavaro :
« Digorit d'in, Aotrou Sant Per,
Mab oun da Werc'hez Lambader ».

IMPRIMATUR :

Quimper, 13 juillet 1927.

A. COGNEAU,

v. g.

A. C.